

KIS-828 – Notennoù gramadegel XIX – Krefen bihan a skrivadur hag a yezhadur (I)

(GE da GC – 15 10 04)

dezneuziañ divgenonnennoù allyezh (I)¹

Dezneuziadur an termennoù etrevroadel, gallek dreist-holl, zo bet skoueriekaet gant Roparz HEMON en e *Gerioù etrevroadel*². El labour-se en doa adkemeret boazioù e ziagentidi ha divrazet un nebeut reolennoù. Hervez ar boaz a oa e hini hag a zo hon hini d'e heul ez asante da nemedennoù : ne gemme ket skrivadur ar gerioù en arver. Evit a sell ar gudenn a zegasez : *kirruz* pe *kiruz* ? e veze miret an daou *r* en amprestoù araozañ : *barrenn*, *karrez*, *bourréau* (gant GREg., met *boureo* gant VALL., nemedenn degemeret gant HEMON) ; dre vras, HEMON a zezneuzias *-ll-*, *-mm-*, *-nn-*, *-rr-* hep kemmañ, war-bouez an nemedennoù usveneget evel *klorofil*, h.a. Ne ro ket skouer Gl. *cirrus*, met hini Gl. *cirre*, dezneuziet gantañ *kirrenn*.

Eil poent eus an un kraf eo dezneuziadur *blizzard*. Aze eo sklaer an traoù : na gant VALLÉE, na gant HEMON ne voe dalc'het divgensonenn (pe elgensonenn evit kemer ger GP) ebet er-maez eus ar peder meneget er c'hevarad kent, eleze na *-bb-*, na *-dd-*, *-ff-*, ... *-tt-*, *-vv-*, *-zz-*. Dezneuziet e vezont er gensonenn eeun : *-b-* ... *-z-*.

arwerc'hañ kensonennoù 'zo goude *-c'h-*³

Un eil kraf eo hini ar gensonenn da arverañ el lostgerioù hag er c'henstrolladoù a echu enno ar gedrann gentañ gant *-c'h* hag a zeraou an eil kedrann dre ur gensonenn gemmadus. Studiet e voe ar gudenn ken abred ha

¹ Sl. La-17 383.

² Sl. HY 12-16 1957.

³ Sl. La-17 380-381.

1972 e ser eskemmoù etre JE, GP ha me, sl. KIS-117, La-06 61-62. Emglev voe war an disoc'h-mañ : sonenn-*c'h-* + kensonenn vlot, kensonenn-*rc'h-* + kensonenn galet : *bouc'hded*, *bac'hded*, *gwerc'hted*, *balc'hted*, eleze *erc'htrell* (notomp an ankempleg a gaver e GEAK gant *erc'hdrev*). Met *luc'hgas* (nemedenn degemeret gant Roparz HEMON da heul VALLÉE : *luc'htorr*, ger dilezet a du 'rall).

Un adkraf a hañvalez degas eo hini *megatermel*. Ne vez kemmadur ebet goude ar rakgerioù amprestet na, dre vras, goude ar c'hedrannoù amprestet en termenoù hiron evel *videotreuzkas*, h.a. Ne lavarar ket **kiloc'hramm* na **minivroz*h !